

Information aux parents sur les temps périscolaires

Groupe scolaire KERAVEL – GOAREM GOZ

ANNEE 2024-2025

Afin de garantir un accueil de qualité pour vos enfants pendant les temps périscolaires, merci de prendre en compte les informations suivantes :

➤ L'accueil périscolaire du matin : 7h15-8h35

- Les maternelles :

Les enfants sont accueillis dans le premier modulaire qui est la garderie maternelle. L'accès se fait par le petit portail à gauche du bâtiment de l'école, longer sur la droite jusqu'au portail vert puis traverser la cour maternelle.

Concernant le pointage : les parents notent quotidiennement les besoins (pause méridienne, accueil périscolaire, car) sur la feuille de pointage à l'entrée de la classe. Pour les enfants qui viennent en garderie du matin, les parents précisent aux animateurs les besoins de la journée (pause méridienne, accueil périscolaire, car).

- Les élémentaires :

Les enfants sont accueillis dans le deuxième modulaire qui est la garderie élémentaire. L'accès se fait par le petit portail à gauche du bâtiment de l'école, longer sur la droite jusqu'au portail vert puis traverser la cour maternelle, le modulaire se trouve sur la cour élémentaire.

Concernant le pointage : merci d'indiquer chaque matin à votre enfant s'il mange à la cantine, s'il reste à l'accueil périscolaire et s'il prend le car, lors de l'appel par l'enseignant, votre enfant s'inscrit ou non pour les temps périscolaires.

En cas de changement ou d'oubli, merci de contacter le 06 33 45 86 14 (maternelles) et le 06 03 61 68 50 (élémentaires) et de laisser un message.

➤ L'accueil périscolaire du soir : 16h45-18h45

Les enfants peuvent être récupérés à partir de **17h30**, avant les enfants sont au goûter. Pour ne pas perturber le goûter, il ne sera pas possible de le récupérer avant cet horaire.

Seuls les enfants (de plus de 6 ans) bénéficiant d'une autorisation des parents pourront quitter seuls la garderie.

L'équipe d'animation ne confiera votre enfant qu'à une personne étant sur la liste des personnes autorisées à récupérer votre enfant. Pensez donc à faire un document ou mail si une autre personne est amenée à venir chercher votre enfant et à le remettre à un membre de l'équipe ou à la coordinatrice.

Enfin, durant les temps périscolaires, il est interdit d'accéder aux classes.

➤ **La pause méridienne : 11h45-13h45**

- Les maternelles :

Les arrivées et les départs sont échelonnés dans le réfectoire, par groupe :

- Les enfants de TPS-PS : temps de repas et sieste
- Les enfants de MS : temps de repas et sieste
- Les enfants de GS : temps récréatif, temps de repas et temps calme. Le temps calme est un moment de repos où les enfants peuvent écouter une histoire, de la musique, faire des coloriages, des puzzles, des jeux calmes. Au fil de l'année, les animateurs de GS pourront également leur proposer des activités manuelles.

Les enfants qui déjeunent à la maison peuvent revenir à l'école entre **13H35 et 13H45**. Ils sont accueillis par les enseignants au niveau de l'entrée monolingue du bâtiment maternel.

- Les élémentaires :

Les enfants peuvent manger quand ils le désirent, cependant chaque jour un niveau sera prioritaire et les animateurs le signaleront aux enfants au moment de l'appel dans les classes. Un animateur les fait entrer par petits groupes et suivant leurs affinités dans la cantine. Dès le 16 septembre, les animateurs pourront proposer des activités aux enfants. Un espace jeux libres mais surveillé par un animateur sera également mis en place.

Les projets sont travaillés en équipe et changent à chaque période (de vacances à vacances), plusieurs domaines sont proposés aux enfants selon les différents espaces (jeux collectifs, activités manuelles, cuisine, création de spectacle, jeux libres...).

Le programme des animations de la pause méridienne élémentaire et GS sera accessible sur l'espace citoyen et sur site internet de la Mairie, il sera aussi affiché au niveau des garderies.

Les enfants qui déjeunent à la maison peuvent revenir à l'école entre **13H35 et 13H45** par le grand portail gris puis la cour élémentaire.

➤ **Equipe d'animation-Atsem :**

En maternelle			En élémentaire
L'accueil périscolaire du matin 7h15-8h45			
Christine Amandine			Alexandra Benjamin
Les enfants qui arrivent avec le car scolaire sont accueillis par Julianne			
La pause méridienne 11h45-13h45			
Avec les TPS-PS :	Avec les MS :	Avec les GS :	
Armelle Sophie Christine	Géraldine Christine	Carole Françoise Amandine	Alexandra, Benjamin, Jordan Pauline, Tamas, Valérie Fanny, Julianne, Alan, Fabienne
L'accueil périscolaire du soir 16h45-18h45			
Les enfants qui prennent le car sont accueillis par Jocelyne			
Christine LG Amandine Christine S			Alexandra Benjamin Julianne
Coordinatrices périscolaires			
Gaelle LANSONNEUR			Sandrine LE GALL

➤ **CONTACTS :**

Pour tous renseignements concernant la garderie ou la pause méridienne, pour inscription/annulation de dernière minute en garderie ou en cantine, ou si votre enfant doit s'absenter pour rendez-vous médical sur la pause méridienne ou garderie du soir n'hésitez pas à nous contacter.

GARDERIE

Maternelle 06 33 45 86 14

Elémentaire 06 03 61 68 50

COORDINATRICES

Maternelle : Mme LANSONNEUR Gaelle : 06 81 26 93 20 gaelle.lansonneur@mairie-plougastel.fr (9h00 à 17h du mardi au vendredi)

Elémentaire : Mme LE GALL Sandrine 06 77 68 68 15 sandrine.legall@mairie-plougastel.fr (9h30 à 17h30 du lundi au jeudi)

En cas d'indisponibilité de l'une des coordinatrices n'hésitez pas à contacter l'autre.

Merci de votre compréhension.

Cordialement.

Titouroù evit ar gerent diwar-benn ar mareoù troskol

Strollad skolioù KERAVAL – GWAREMM GOZH

BLOAVEZH 2024-2025

Evit gallout degemer ho pugale evel m'eo dleet er mareoù troskol e c'houlennomp e lennfec'h an titouroù amañ da-heul :

➤ **An degemer troskol diouzh ar mintin : 7e15-8e35**

- Er skol-vamm :

Degemeret e vez ar vugale er savadur kentañ, an diwallerezh evit ar re vihan eo. Mont a reer e-barzh dre ar porrastell bihan a-gleiz da savadur ar skol, dav eo kendelc'her war an tu dehoù betek ar porrastell gwer ha treuziñ porzh ar skol-vamm.

Evit a sell ouzh ar galv : bep mintin e skriv tud ar vugale o ezhommoù (ehan kreisteiz, degemer troskol, karr-boutin) war follenn ar galv a zo e degemer ar c'hlas. Evit ar vugale a ya d'an diwallerezh diouzh ar mintin e rank ar gerent kelaouiñ ar vuhezourien a-fet ezhommoù evit an devezh (ehan kreisteiz, degemer troskol, karr-boutin).

- Er skol kentañ derez :

Degemeret e vez ar vugale en eil savadur, an diwallerezh evit ar c'hentañ derez eo. Mont a reer e-barzh dre ar porrastell bihan a-gleiz da savadur ar skol, dav eo kendelc'her war an tu dehoù betek ar porrastell gwer ha treuziñ porzh ar skol-vamm, emañ ar savadur war borzh ar skol kentañ derez.

Evit a sell ouzh ar galv : reiñ da c'houzout d'ho pugel bep mintin hag-eñ ez a d'ar c'hantin, hag-eñ e chom en diwallerezh, hag-eñ e kemer ar c'harr-boutin. Pa vo galvet gant ar skolaer e lakay ho pugel e anv evit ar mareoù troskol, pe ne ray ket.

Ma vez ur cheñchamant bennak pe m'ho pezh disoñjet un dra bennak, pellgomz d'an niv. **06 33 45 86 14** (skol-vamm) ha d'ar **06 03 61 68 50** (kentañ derez) ha lezel ur gemennadenn.

➤ **An degemer troskol diouzh an noz : 4e45-6e45 noz**

Gallout a ra ar vugale mont kuit adalek **5e30 noz**, rak gant o merenn-vihan e vezont a-raok. Kuit da lakaat reuz e-kerzh merenn-vihan ne c'hall ket an dud dont da dapout o bugale a-raok an eur-se.

N'eus nemet ar vugale (ouzhpenn 6 vloaz) gant un aotre eus perzh o zud a c'hall mont kuit o-unan eus an diwallerezh.

Ne vo lezet ho pugel da vont nemet gant un den hag a zo war roll an dud o deus aotre da zont da gerc'hat ar bugel. N'ankouait ket kas ur follenn pe ur postel d'un ezel eus ar skipailh pe d'ar genurzhierz ma teu un den all da gerc'hat ho pugel.

E-pad ar mareoù troskol eo difennet mont er c'hlasoù.

➤ **Ehan kreisteiz : 11e45-1e45 gm**

- Er skol-vamm :

Mont a reer e-barzh hag e-maez ar predva a-strollad, pep strollad d'e dro :

- Klasoù a re vihanañ hag ar re vihan : pred ha kousk-aez dre glasad
- Klas ar re grenn : c'hoari, pred ha kousk-aez dre glasad
- Klas ar re vras : c'hoari, pred ha prantad sioul dre glasad Ur prantad diskuizhañ eo ar prantad sioul, ma c'hall ar vugale selaou un istor, sonerezh, livadenniñ, ober miltammoù, c'hoarioù sioul. E-kerzh ar bloavezh e c'hall ar vuhezourien a zo gant ar re vras kinnig obererezhioù dom dezho ivez.

Ar vugale a zebr er gêr a c'hall distreiñ d'ar skol etre **1e35 hag 1e45 gm**. Degemeret e vezont gant ar gelennerien dirak mont tre ar c'hlasoù skol-vamm unyezhek.

- Er skol kentañ derez :

Gallout a ra ar vugale debriñ pa fell dezho, met bemdez e vo ul live a vo lakaet da dremen da gentañ ha kelaouet e vo ar vugale gant ar vuhezourien da vare ar galv er c'hlasoù. Lakaet e vezont da zont tre er c'hantin dre strolladoù bihan gant o mignoned. Adalek ar 16 a viz Gwengolo e c'hall ar vuhezourien kinnig obererezhioù d'ar vugale. Ul lec'h evit c'hoari en un doare frank, dindan evezh ur buhezour, a vo ivez.

Ar raktresoù a vez kaset dre skipailh ha cheñch a reont da bep marevezh (eus an eil mare vakañsoù d'egile), doareoù c'hoarioù a bep seurt a vez kinniget d'ar vugale diouzh al lec'hioù (c'hoarioù a-stroll, obererezhioù dorn, keginañ, sevel un arvest, c'hoarioù frank...).

Programm an abadennoù buheziñ e-pad an ehan kreisteiz evit ar c'hentañ derez ha klasad ar re vras zo en egorenn geodedour hag e lec'hienn an Ti-kêr, ha skritellet eo e-kichen an diwallerezhioù ivez.

Ar vugale a zebr er gêr a c'hall distreiñ d'ar skol etre **1e35 hag 1e45 gm** dre ar porastell bras gris ha dre porzh ar c'hentañ derez goude.

➤ **Skipailh buheziñ-Gwaasm :**

Evit ar skol-vamm			Evit ar c'hentañ derez
An degemer troskol diouzh ar mintin 7e15-8e35			
Christine Amandine			Alexandra Benjamin
Ar vugale a zeu gant ar c'harr-boutin a vez degemeret gant Julianne			
Ehan kreisteiz 11e45-1e45 gm			
Gant ar re vihanañ hag ar re vihan :	Gant ar re grenn :	Gant ar re vras :	
Armelle Sophie Christine	Géraldine Christine	Carole Françoise Amandine	Alexandra, Benjamin, Jordan Pauline, Tamas, Valérie Fanny, Julianne, Alan, Fabienne
An degemer troskol diouzh an noz 4e45-6e45 noz			
Ar vugale a zeu gant ar c'harr-boutin a vez degemeret gant Jocelyne			
Christine LG Amandine Christine S			Alexandra Benjamin Julianne
Ar c'henurzhierzed troskol			
Gaelle LANSOÑNEUR			Sandrine ar GALL

➤ **DAREMPREDOÙ :**

Deuit e darempred ganeomp evit gouzout hiroc'h diwar-benn an diwallerezh pe an ehan kreisteiz, evit enskrivañ/nullañ an enskrivadur en diwallerezh pe er c'hantin er mare diwezhañ, pe ma rank ho pugale mont d'un emgav mezeg e-kerzh an ehan kreisteiz pe e-kerzh an diwallerezh da noz.

DIWALLEREZH

Skol-vamm 06 33 45 86 14

Kentañ derez 06 03 61 68 50

KENURZHIEREZED

Skol-vamm : **An it. Gaelle LANSOÑNEUR : 06 81 26 93 20** gaelle.lansonneur@mairie-plougastel.fr (etre 9e ha 5e eus al Lun betek ar Yaou)

Kentañ derez : **An it. Sandrine ar GALL 06 77 68 68 15** sandrine.legall@mairie-plougastel.fr (9e30 betek 5e30 eus ar Meurzh d'ar Gwener)

Ma ne dapit ket kaout ur genurzhiered ouzh ar pellgomz, pellgomz d'eben.

Emichañs eo mat pep tra deoc'h.

A galon,